

**Mathalizi-Ab-Gwenc'hlan** (Georges Le Rumeur) (Foujera 1882 – Azay-Le Rideau 1942)

**Breiz Divarvel : Dibab sonigou brogar.** Bet embannet e 1913.

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Faziou kemmaduriou ha viou-koukoug a zo er skrid orin. Reizet int bet.

Meur a varzoneg 'zo nasionalist Souezuz eo : an darn-vrasa euz "nasionalisted" Vreiz a zo tud a zo bet savet a-hed ar vevenn goz.

### Taolenn

Kentskrid gand ar Barz Taldir	Ali berr	
Kinnig	Va ano barz	
Pedenn	Karantez-Vro	
Ar varzed	Devez hañv	
Breiz divarvel	Korventenn	
Pez a lavare George Sand	Breh-Helian	
Heñveldigez	Beure lirzin	
Yez ar Gelted	O Mor !	
An euzusañ tra	Va ene	
Buhezusted on Gouenn	Stad al labourer-douar	
Dihunom !	Chalmou va Bro	
Kentoh mervel !	D'eur Henvreur	
Anken	Breiziz penn-kil-ha-troad	
O ! heol !	D'on Breiz hepken !	
Reier Ploumanah	824 – 851	
Serr-noz	Adsavedigez Breiz	
Ar glañvourez yaouank	Da Loeiz Kerzilin	
Krenet	Bro-Gerne	
Youlou ar Vreiziz	Da Germarker	
Breiz hag he mibien	Esper Brizeuk	
Me 'gar...	Lorh a zo ennon	
Mann da hortoz	Huñvre ha gwirionez	
Menez-Bre	An amzer 'hall tremen...	
Va hoantiz	Mestr ha mevel	
Enez Eusa	Banniel Breiz	
An amzeriou 'zo arru		

# Kentskrid

Er bloavez 1882, d'an 28 a viz Eost, e hane er Radenneg, lodenn-vro Ille-ha-Vilaine, eur poupig hag a oa roet dezañ gand e dud an ano a Georges. E dad a oa eun Tregeriad divroet, Yann-Loeiz Ar Rumeur e ano, hag a honeze e vuhez evel den implijet e-barz stasion hent-houarn ar gêr-ze.

Nebeud amzer goude e henivelez, mamm Georges, a oa genidig a Vreiz-Uhel, a rentas he ene da Zoue, ha setu eun emzivad bihan chomet war divreh e dad.

E dad-koz, kemener e Lannuon, hag eur hoar d'e dad, euz an heveleb kêr, a ginnigas dre vadelez d'an intañv rei dorn dezañ da zavel e grouadur. Setu eno penaoz e teuas Georges ar Rumeur da veva da vro e dud koz.

Petra bennag, e skrive din eur wech, « biskoaz ma herent n'o-deus lavaret eur ger brezoneg din », na, 'vid-se, an êr breizeg, en hini<sup>1</sup> e vevas en Lannuon beteg an oad a 14 vloaz, ne chomas ket heb merka war e demper<sup>2</sup>. An arvestou euz "Bro goz e dadou", ar yez vurzuduz, ken disheñvel ouz gallegaj kêriz, a gleve beb yaou war al leur-gêr pa zeue ar beizanted a dro war dro d'ar marhad, kement-se oll ne oa ket heb digeri dirazañ eun dremmwel all, heb leuskel eun aroudenn don en e spered a vugel, heb aoza an toaz tenerig-se da zegemer diwezatoh ar peurstumm a vije roet dezañ dre eun deskadurez haz dre eun darempred broadel.

Da 14 vloaz, Georges a guitaas Lannuon evid mond daved e vamm-goz – mamm e vamm – o chom e Roazon. Eno e peurreas e zeskamant en eur heuill tri bloaz c'hoaz ar skol primaër<sup>3</sup>, ha d'an oad a zeiteg vloaz, en em lakaas war ar vicher a horolacher, war an hini<sup>4</sup> e labour bepred.

\*

Buhez eur micherour evel-se ne vefe ket disheñvel nemeur deuz buhez meur a genvreur all dezañ *paneved* eun dra, tra pouezuz, hag a ra gand ar vuhez plên ha distroñs-se, eur vuhez vurzuduz ha kaer, paneved, emezon-me, d'an hadenn a gouezas en ene-ze, hag a lakaas da ziwan ennañ bod dispar ar Varzoniez vrogar ar burra hag ar vuia teleneg<sup>5</sup>.

Pa oa Georges ar Rumeur o labourad an horolacherez en Roazon, er bloavez 1900 – gwelit amañ penaoz tud partiet a beb avel a zegouez asamblez en heveleb kroazhent, - me a oa ivez en kêrbenn Breiz o studial al lezennou.

Savet am-oa greet eno eur vreuriezh etre ar Studierien vreton. Ar gazetenn *Ouest-Eclair* a oa hekleo on bodadegou. Georges ar Rumeur, pa lenne ar rentadou-kont euz on dastumadegou breizad, a zante e wad o vervi. A-greiz-oll, e teuas soñj dezañ euz ar bloaveziou tremenet en Lannuon ; euz ar gizioù breizeg damwelet war ar mêz evel en eun huñvre berr, euz ar yez klevet o tiston war ar marhallah<sup>6</sup>, d'ar yaou... Hag e galon a skoe taoliou pounner en e vruched, evel da hopal dezañ :

« Rumeur ! Sao 'n ez sao ! Petra 'hortozez evid mond da gaoud da vreudeur ? »

Mez siwaz ! Daoust hag e vreudeur a anavezje anezañ ? Ne ouie poz brezoneg ebed ! Ne oa ket eur Breizad tre. Mankoud a ree dezañ an alhwez aour a zigorje dezañ peb dor.

E vennoz a oa greet. Deski brezoneg a raje. Ne chomas ket da varhata.

E dammig espern a oe lakaet da goumananti da *Groaz ar Vretoned*, da *Gloc'hdî Breiz*, d'an *Herminik*, da brena gramadegou ha leoriou evid studial ar yez. Kement ha ken bihan e reas Georges ar Rumeur, gand eur gwir lorch :

---

<sup>1</sup> en hini : en pehini, er skrid orin.

<sup>2</sup> war e demper : war e demz-spered.

<sup>3</sup> ar skol primaër : ar skol derez kenta.

<sup>4</sup> an hini : war behini, er skrid orin.

<sup>5</sup> teleneg : lirenneg.

<sup>6</sup> **war ar marhallah** : (notenn gand Embann an Hirwaz- ano leh ar marhad.

« Mestroniet am-eus yez ma Zadou ! Ar spered keltieg, adkavet am-eus anezañ ! »

Neuze, leun a fiziañs, mab bihan kemener koz Lannuon a yeas da gaoud Olier Sagory, rener Breuriez ar Studierien Vreton en 1903, ha war e houlen e oa degemeret e-touez e genvroiz yaouank.

Adaleg ar mare-ze, Georges ar Rumeur a zo bet eun harper feal hag entanet d'an *Emzao*.

En em lakaad a reas da zevel rimou brezoneg. Da genta e oant digompez ; med beb eun tammig an Awen Naturel a oa ennañ a gavas he zu da vleunia en eur yez kizellet, c'hwek, difazi. Hebdale, *Sonigou* Ar Rumeur a reas tro ar wask vreizad. *Kloc'hdi Breiz, Kroaz ar Vretoned, Ar Vro*, a embannas anezo.

Hag er bloavez 1907, e-pad goueliou Keltieg Sant-Brieg, Gorsedd an Drouized hag ar Varzed a zihaouas al labourer uvel-ze deuz e boan en eur aotrei dezañ an titr a Varz hag ar Zae hlaz, d'ar re<sup>7</sup> en-deus greet abaoe kalz a enor.

\*

Setu ma ya bremañ leor kenta-ganet ar Barz "Mataliz" da zond dirag pobl Breiz-Izel.

Pobl Breiz-Izel a raio dezañ degemer mad, rag, ouspenn ma'z eo skrivet gand eur micherour, dibaot a leor a hallfe en ken nebeud a bajennou rei ken aliez a gentel.

Galloud a ran lavaroud eo turniet gantañ deuz kreh d'an traoñ : rag n'eo ket ar Sonigou hepken o-deus talvoudegez dispar : ar Poltrejou ivez a zo bet dezignet gand « Mataliz », dornet mad evel ma vo gwelet, ha seul-vui delliduz a hourhemennou an dud a anaoudegez, Ma 'n-eus, en dezin evel en pep tra all, en em hreet e-unan.

En eur lenn *Breiz divarvel*, gwitibunan a hall deski penaoz e teu eul labourer da veza, gand youl ha poan, eur Breizad rik, eur Barz awenet, hag eun Den, e lavaridigez ledann ar ger.

*Taldir Jaffrennou*

---

<sup>7</sup> d'ar re : da bere, er skrid orin.

## Ali berr

Al labour uvel-mañ a zo reizet hervez doare-skrivañ « *Emgleo ar skrivagnerien* ».

E penn ar gwerzennou hepken em-eus heuliet ar frankiz lezet d'ar varzed, na petra 'ya, diwar-benn al lizerennou kreñv pe vlot, deze da glotañ gwelloh a zo, kenkoulz evid an daoulagad ha 'vid an dioukouarn.

# Kinnig

Al levrig-mañ 'zo kinniget  
D'an oll Arvoriz a labour  
Da ziwall o Breiz venniget  
Ouz kraban ar Gall enebour,

D'an oll Arvoriz a hoanta  
Ober ganti eur Vro nerzuz<sup>8</sup>,  
Eur Vro goant 'mesk ar re goanta,  
Eur Vro dishual, difêzuz,

Krinniget eo, dreist-oll, d'ar re  
A zo en he fenn : d'ar Varzed  
Leun a ouiezegez hag ar re<sup>9</sup>,

Dindan sell ar bed souezet,  
A stur ken dispar en eur mor  
Du a rehell, bag an Arvor.

---

<sup>8</sup> Ober ganti eur Vro nerzuz : nasionalist e oa evel meur a skrivagner an amzer-ze.

<sup>9</sup> ar re : pere, er skrid orin ;

## Va ano barz

Mataliz ! lesano va gourdadou karet,  
Lesano o-deus oll douget 'pad o buhe'  
Gand kemend a herrder : hag a zoug c'hoaz hirie,  
En kêrig Lannuon, va zud-koz enoret !

Setu em-eus ivez, d'am zro, da gemered  
'Vid boud va ano 'barz ! Keid m'en-devo truez  
Ouz va zamm lorvig paour an Ankou mud ha gouez,  
Ganin, heb fallaenn, heb gwander, «'vel m'eo red,

'Vi douget, m'hen tou kreñv ! O ! lesano lirzin !  
Lesano dudiuz ! Rag war-zao e vezin,  
Bemdez, evid divenn kaloneg ha dalhmad,

Evid divenn ar Gwir, evdi divenn ar Mad,  
Ha spered keltieg Breiz-Izel, va bro goant,  
Ken hegaset hirie gand ar Gall diskiant !

Gwengolo, 1908.

# Pedenn

Yor<sup>10</sup> azeulet ! Yor gallouduz !  
O ! Kemer damant ouzom-ni !  
Lak an Esper da zuhuni  
En on halonou hirvouduz !

D'on barzed kadarn ro skoazell  
Evid ma hellfont kas da vad  
O labour santel ha kreñvaad  
Speerd enoruz Breiz-Izel !

Eo, 'vel gwechall-goz, d'on divreh  
An nerz dall red 'vid kaoud an treh  
War on oll waskerien haro !

Skuiz eh om o houzañv, o Mestr !  
Ro dim-ni eur Vro digabestr  
Pe ar maro !

Genver 1910.

---

<sup>10</sup> Yor : **notenn gand ar skrivagner** : Ano a vez greet ouz Doue gand barzed gwechall.

## Karantez-Vro

Ma ne vijen Breizad, Breizad 'karfen bezañ !  
Me 'garfe boud ganet en bro ar bleun melen,  
Bro na baouez enni an avel da hwezañ  
Hag ar barz da ganañ nerzuz war e deleñ !

Euzusañ tonkadur ! Ma vijen bet, siwaz !  
Ganet e bro Haskogn pe c'hoaz en Normandi,  
En dra-ze pa zoñjan broud garo an anoaz  
En em ene e skorn peb elfenn a zudi !

Rag eul lorh dizivez eo din bezañ Breton,  
Bezañ mabig da Vreiz ! da Vreiz an dud penneg  
Ha leun a galonder ! da Vreiz ar brezoneg !

'Vid he meuli, va mouez, heb arzao, a ziston...  
O douar va zadou ! O Mamm-vro venniget !  
Va halon 'zo 'vidout a garantez karget !

Eost 1909



## Ar varzed

Ar varzed a zo tud a furnez, a veoder  
Hag ar re 'deus touet, gand ar brasañ herrder,  
Da voud 'pad o buhez divennourien dalhuz  
Ha gwez Keltia goz, o Mamm-Vro dudiuz.

Ne grenont dirag mann ! Ne stouont dirag den !  
« Ar gwir eneb d'ar Bed ! », setu o youhadenn.  
Labourad 'reont oll heb arzao, heb ehan  
Da gelenni poblou Breiz-Veur ha Breiz-Vihan.

Euz pleg-mor kêr Dublin da ruiou kêr Redon,  
Euz tal briz ar Ben-Mor<sup>11</sup> da rehell ar Snowdon<sup>12</sup>,  
O moueziou a entan ar halonou kerreiz<sup>13</sup>.

Derhel a reont stard bannielou an diou Vreiz  
Ha 'vel gwechall gouenn hlan ar Gelted difêzuz  
A lak he oll esper en o youlou nerzuz.

Eost 1905.

---

<sup>11</sup> Ben-Mor : **notenn gand ar skrivagner** : Menez uhel a Vro-Zaoz.

<sup>12</sup> Snowdon : **notenn gand ar skrivagner** : Gwyddfa en Kembraeg, menez a Vro-Gembre.

<sup>13</sup> kerreiz : **notenn gand ar skrivagner** : klouar.

## Devez hañv

Eun deiz, da ziskuizañ goude eur bale hir,  
Chalmet, eh azezis en eur vruged joañ,  
O henel 'oa an hañv, ha bannou dudiuz  
An heol a beurdomme kein kaled ar veinhir<sup>14</sup>.

War-horre pep tosen bagadou niveruz  
A zeñved a beure eur yeot leun a hwez-vad,  
Hag en disheol teñval an dero, gand eurvad,  
Ar mesaer a zoñje d'e goantiz jodou ruz.

Ne oa dre-oll nemed gêder ha levne' :  
Ar wenanenn e-mesk ar bleuniou 'zafrone  
Keid am vije didrouz ar valafenn zeder.

An evnig, evuruz, a-bouez-penn 'richane,  
Mouez ledan ar horn-boud 'zistone er pellder,  
Hag an oll hekleoioù, pennfollet, a gane.

Gouere, 1907.

---

<sup>14</sup> ar veinhir : ar peulvanou

## Breiz divarvel<sup>15</sup>

Bro ar bleunou melen, bro goz an telennou,  
Bro zakr Nevenoe, o Breiz-Arvor ! evel  
Reie da aochou glan ha meinhir da lannou,  
Te a zo heb arvar na doutañ divarvel !

Ya, bro 'n emgannou meur, broad leun a veurder,  
Te a zo divarvel ! Da zouar avelet  
A vo buhez bepred, gand ar brasañ preder,  
Da harozed uvel ha da varzed poelleg.

Da wir varzed a-ouenn, 'vel biskoaz awenet,  
A zihun, a entan, dre o gwerziou tanet,  
Dre o zoniou tener hag o frezeg nerzuz.

Kalon fur med klouar da Bobladig karet,  
Ya, te 'zo, Breiz ar feiz, divarvel, difêzuz !  
Padelez da Istor n'hall ket bezañ torret.

Kaer 'n-eus da enebour diskiant ha bourduz  
Kredi penaoz bremañ n'out 'med eur horv maro  
Dindan e hualou, n'eus forz ! mamm hallouduz,  
Lez gand ar Gall digar e gredennou garo,

Ha bez dineh ! Rag ni, da vibiden diniver,  
Ni oll da vugale, da Vretoned leal,  
Ez om war-zao bemdez prest d'ober on dever  
A vrogarourien ouez<sup>16</sup>, 'vel on Tadou gwechall.

D'az miroud piz, heb aon, ouz dent al leoned,  
Ouz an islonkou don ha da skuill gwad on hreiz,  
Gand dudi, mar deo red, o Mamm-Vro garet Breiz !

'N eur ziwall nann hepken da enor, da gened,  
Nann hepken da yez ker ha da spered ker reiz  
Med ivez da giziou ha da frankiziou reiz.

Even 1912

---

<sup>15</sup> Breiz divarvel : **notenn gand ar skrivagner** : Sonig bet loreet en 1912 gand « Unvaniez Arvor » en he hentskrivadeg soniou a hiz koz.

<sup>16</sup> ouez : gwe, er skrid orin ( ?)

## Korventenn

Ar mor a oa spontuz da weled an deiz-se,  
An avel 'uz dezañ, an avel gouez, torret  
Gantañ e chadennou, a yude, a hweze,  
Hag heb arzao outañ e stourme fuloret.

Ar gwagennou ken braz, ken teo ha meneziou,  
Heñvel ouz loened foll, 'n em zraille gand araj  
Ouz kein garo ar reier du, hag o moueziou  
Nehuz en em veske gand moueziou an oraj<sup>17</sup>.

An touriou-tan uhel, dindan o zaoliu kri',  
'Vel pa vijent bet mezo 'horjelel ! Al listri,  
Pennfollet, d'o forziou a zerede buan.

Ha me, aonig rag eun heveleb euzusted,  
'Zerre va daoulagad ! O ! nag eo 'ta bihan !  
Nag eo dister an den dirag an divented !

Gwengolo 1905.

---

<sup>17</sup> oraj : galleg : arne.

## **Pez a lavare George Sand**

Eur skrivagnerez hall, goude bezañ lennet  
Oberou Kermarker a vanas estonet  
Rag ma ouie tamm 'bed, emezi, 'oa en Breiz  
Gwerziou ken ijinuz, ken uhel ha ken reiz.

Ne ouie tamm e oa pobl rust ar Vretoned  
Gouest da zevel barzonegou ken awenet.  
"Kinnig Nevenoe" d'he so~~j a oa kaerroh,  
Mil gwech 'vid an "Iliad", daoust dezañ da voud berroh.

Dre ze, leun he halon a zoujañs ouz on Gouenn  
Hga ouz he lennegez, dre-oll hi 'lavare  
Ar geriou nerzuz-mañ : « Neb a zoug eur bluenn,

Neb a gar e Vamm-Vro hag a zo diere,  
Pa zegouez dezañ tremen e-biou da Vreizidi  
'Dleje atao lemel e dok d'o zaludi ! »

Kerzu 1910.

## Breh-Helian<sup>18</sup>

Pa vez braz an tommder, me 'gar neuze moned  
Da zoñjal pe da lenn en koad Breh-Helian.  
Eno, en disheol, fresk e zero, a glevan  
O hirvoudi moueziou an *Amzer dremenet*.

Nag a varzed a-hed e wenodennou moan  
O-deus taolet d'an neñv o barzaz entanet !  
Nag a varheien daer ivez a zo ganet  
'N e greiz evid diwall enor on Breiz-Vihan !

E lannou torgeneg, e draoniennou lirzin  
Hag e runiou 'vir c'hoaz, dinamm en o feuh<sup>19</sup> don,  
Koun paduz Vivian, Arzur-Meur ha Marzin

Hag evel pa oant beo, dour feunteun Baranton,  
'N eur bokad d'e vrugou, a gan atao laouen,  
Noz ha deiz ; heb ehan, e dammig kanaouenn.

Gouere 1905.

---

<sup>18</sup> Breh-Helian : **notenn gand ar skrivagner** : Brocéliande en galleg.

<sup>19</sup> o feuh : tergerieg : o feoh.

## Heñvedigez

Breizaded a zo c'hoaz, dre vil, hirie an de',  
Ha na ouznt, allaz ! mann euz ar pezh a zell  
Ouz Istor meuleuduz ha kadarn Breiz-Izel,  
O Mamm-Vro, bet gwechall ken doujet koulskoude !

Ar re-ze pa ra goap oute ar Gall divez,  
Pa lar dezo n'ez int 'med gouezidi benneg,  
Pa pe dro kein dezo pa gomzont brezoneg,  
Ar re-ze oll a bleg o fennou gand ar vez !

Hogen ar Vreiziz vad, ar re<sup>20</sup> deus gand preder  
Studiet 'n Istor-ze dreist an oll benniget,  
O daoulagad a luh, a sked leun a herder.

Ha dirag o flammou ar gwasker milliget  
A zigor gand souez e veg ha buanig,  
A zouz en eur grenañ, evel eur plah aonig.

Here 1907.

---

<sup>20</sup> ar re : pere, er skrid orin.

## Beure lirzin

Drant ha lugernuz, er pellder,  
A heol a bign 'uz d'ar mene'  
Ha, dihunet, va Bro zeder  
'Zell en eur bedi ouz an ne'<sup>21</sup>

War he lannou, he farkou ed<sup>22</sup>,  
Eun êzenn flour a hwez... a hwez...  
Hag an evned o klask o boued  
A vouskan laouen, hep paouez.

Ar brugou dister, liou gand gwad,  
Ar bleuniou balan glizennet  
A laosk en-dro din o hwez-vad.

Keid ma kaerzan mezevennet,  
Penn-baz em dorn, hag an ene  
Peurleun a beuh<sup>23</sup>, a levene'.

Eost 1902.

---

<sup>21</sup> ne' :neñv.

<sup>22</sup> he farkou ed : fazi : he farkadou ed.

<sup>23</sup> a beuh : tregerieg : a beoh.



## Yez ar Gelted

Yez a gane gwechall war o zelennou dir  
Aneurin ha Gwenhlan, Osian ha Marzin !  
Yez a gan hirie c'hoaz en o gwerziou lirzin  
Houva-Mon ha Berthou, Gwynn Jones ha Taldir !

Setu 'n-eus c'hoant ar Gall d'az mougañ en on Breiz !  
Hogen, ar paour-kêz sod ! Kaer 'n-eus bezañ nerzuz,  
Ne zeuio ket a-benn ezu e dorfet euzuz,  
Kalonou birvidig 'lamm atao en on hreiz !

Ha n'eo ket evid mann ! Prest om hiviziken  
Da skuill on gwad beteg an diwezañ takenn  
Evidout mar deo red, o yez koz ! o yez kaer !

Galloud 'rez 'ta bezañ dineh ha dianken,  
Rag en despet da youl milliget ar gwasker,  
Enoret en on touez, e vevi da viken !

Kerzu 1903.

# O Mor !

O mor glaz ! Mor treitour ! Mor yud ! Mor disleal !  
Pa glevan da goummou goapaüz o youhal  
Tro-war-dro d'ar reier a houriz va Bro gêz,  
Raktal e sav d'am fenn tan ar vuanegez !

Nag a besketerien ! Nag a vordeidi  
A zebrez gand eurvad, siwaz ! Ha gand dudi  
Nag a zaerou c'hwero da fuloriou direiz  
A lak da ruill ken puill en oll dier a Vreiz !

Petar, lar din, 'zo kaoz ma'z out ken didruez  
Ha ken fall e-keñver an Arvoriz, mor gouez ?  
Penegwir droug ebed dit biskoaz n'o-deus greet.

Spontuz ha dinatur e kavan da grizder  
Ha n'ez on ket evid kompren perag bepred  
E karont ahanout gand kemend a veoder<sup>24</sup> !

Here 1905.

---

<sup>24</sup> a veoder : **notenn gand ar skrivagner** : Beoder ; ardeur en galleg.

## An euzusañ tra

Euzuz eo gweled ar mor braz  
En e fulor en Beg ar Raz  
O lonkañ laouen, hep truez,  
Ar pesketer leun a vuhez.

Euzuz eo gweled en on touez  
An naon a ren, digar ha gouez,  
Euzuz eo gweled an oraj<sup>25</sup>  
O traillañ ar vro gand araj.

Ha dirollet an doureier  
O veuzi parkou ha tier,  
Med euzusoh c'hoaz eo gweled

Arvoriz yud ha penngollet  
O werzañ da Vro-Hall direiz,  
Evid enoriou gwag, o Breiz.

Here 1904.

---

<sup>25</sup> an oraj : an arne.

## Va ene

Te da-unan, Armor, eo bro va huñvreou.  
Pa gousk an den, e-kreiz an noz du, va ene,  
'Trezeg da lanneier didrouz ha da voriou  
A nij, heb aon ebed,ouz yudou an arne.

Hag 'uz dezo p'arru, diskenn a ra joaüz  
'Vid korolli 'samblez gand an duzedigou,  
Pe 'vid en em deurel en divreh lokaouüz  
Ar morwragez a gan war-horre ar gwagou.

Ha pa 'n-eus tañveet a-walh a lidou goue'  
Muioh eged biskoaz naoneg a visteriou,  
Eh adkemer e nij en avañtur-Doue.

Beteg ma son kloh an dihun 'barz an touriou  
Ha ma skuill an heol aour, o sevel er pellder,  
E vannou lugernuz war an douar seder.

Gouere 1906.

## Buhezusted on Gouenn

Monumantchou ken orgouilluz ar Romaned,  
Maherien goz on ras<sup>26</sup>, emaint oll dispennet.  
Re on Tadou, avad, o fennou a zav c'hoaz  
En peuh al lanneier ken dineh ha biskoaz !

O latin flour, nemed en ilizou hepken  
Ne zon mui ! Maro eo ivez da virviken !  
E-leh on lañgach-ni ken koz : ar brezoneg,  
A vez komzet atao 'n on mêziou torgeneg !

Hep poan ebed, erfin, an amzer 'zo bet treh  
D'o spered fougéüz, daoust da nerz o divreh,  
D'o galloud, d'o ijin ha d'o halonder goue' !

Treh e vo memez tra d'on gwaskerien hirie ;  
Ha dirag testenou diskaret o braster  
On Gouenn skedo c'hoaz nerzuz ha dibreder.

Du 1903

**Notenn gand Embann an Hirwaz** : *on lañgach-ni ken koz : ar brezoneg,  
A vez komzet atao*

Se 'oa gwir e 1903. Mez faoz eo deut da veza kant vloaz war-lerh. Perag ?

Evel-just ez eus bet levezon ouennelourezeg a lavare “ne vo greet nemed gand ar galleg er skoliou“, med surroh c'hoaz pa veze galleg yez ar re a oa e penn an arboellerez. Red e veze gouzoud ar galleg evid tapoud eul labour bennag.

Ha bremañ, ma talh an traou da vond evel m'emaint, a-benn kant vloaz, e vo ar galleg dirag ar zaozneg evel m'ema bremañ ar brezoneg e-keñver ar galleg.

---

<sup>26</sup> ras : gouenn.

## Stad al labourer-douar

Hetuz-meurbed eo stad al labourer-douar.  
Bevañ a ra en peuh pell dimeuz savariou,  
Pell dimeuz fallentez ha diroll ar hêriou  
En eur ganañ laouen, rag hirvoudi ne oar.

A-wechou koulskoude e labour a zo tenn  
Hag euz e dal bero ar hwezenn a ziver,  
Med leun eo e galon, avad, hag an dever  
Gand ar spi 'zo bepred a-walh 'vid e zouten.

Mestr<sup>27</sup> ebed n'en-deus. E frankiz 'zo divent  
Hag êr hlan ar mêziou a nerza e skevent.  
Labourad 'ra 'vel daou dre m'eo leun a yhed.

Ha d'an noz, goude koan, e tiskuiz evuruz,  
En e di-soul, e-kreiz e vugale karuz,  
Dindan sellou kuñv e bried.

Meurz 1908

---

<sup>27</sup> Mestr : Mistri ebed, er skrid orin.

## **Dihunom !**

Dihunom ! O ! Kelted Breiz-Vihan ha Tramor !  
Setu an amzeriou diouganet gand Marzin  
O toned ! Dihunom ! hag en daou du d'ar mor  
Unanom on daouarn ha kanom oll, lirzin !

Kanom oll, en eur vouez, ar “Vro goz ma zadou“,  
On han broadel kaer ! ha diskouelom timad  
D'ar Zaozon ha d'ar Gall ha d'an oll Vroadou  
Ez om eur Ouenn atao ! eur Ouenn hag a zalh mad !

Diskouelom deze on-eus hirie evel gwechall  
C'hoant da vevañ en peuh, difank ha dishual,  
'N on hoajou koz dero, 'n on lannou torgeneng !

Dihunom 'ta ! Ddeut eo an eur, paotred penneg !  
Dihunom ! ha war-zao ! War-zao evid on Bro !...  
Enez Aval a drid e-kreiz ar mor garo...

Even 1902.

## Chalmou va Bro

Braster divent ar mor ! kened al lanneier !  
Koantiri lugernuz ar mêziou alaouret !  
Gouester an aochou gwerh ! peuh don ar hoajeier !  
Na frealzuz oh-c'hwi d'am ene glaharet !

Ma vije red din-me ho tilezel da vad,  
Ho tilezel 'vid mond 'trezeg kêriou Bro-Hall,  
Neuze va halon baour en em rannfe avad  
Ha den ouz ar maro ne hellfe va diwall !

Med se n'arruo ket ! Ho karoud a ran re,  
O ! chalmou diniver douar kuñv va haret !  
En ho kreiz, heb arzao, ho kanin diere.

Ha va mouez lark, ouz mouez ar hoummou-mor heñvel,  
Evid se, a-wechou 'n em raio ken tener  
Hag hini ar bugel o lared e bater !

Ebrel 1904.



## **Kentoh mervel !**

O ! karom ar frankiz, Bretoned, herr ha gouez !  
Atao 'vid he diwall, atao bezom war-zao !  
Evid ma vezo ganim eur hwevadenn vuhez  
Stourmom oll eviti, kaloneg, heb arzao !

Na kriz, na spontuz eo allaz ! bezañ karget  
A chadennou, leñvañ, huanadi c'hwero  
Ha gouzañv dirag sell an treher milliget !  
Gwelloh ez eo mil gwech ha dousoh boud maro !

...'Hanta ! sed o-deus c'hoant ar Frañsizien direiz  
D'on brevi, d'on flegañ dindan o gwaskadur...  
Ha lezel 'refom 'neze, paotred heb aon a Vreiz

D'ober d'o faltazi, hervez o flijadur ?  
Nann ! Nann ! Kentoh mervel 'n eur enebi oute  
'Vid boud, 'vel sklavourien, eun deiz, renet gante !

Genver 1903.

**Notenn gand Embann an Hirwaz** : Mond a ra eun tammig re bell !

## D'eur Henvreur

Ya, siwaz ! truezuz eo hirie stad on Breiz.  
Ha Bretoned a zo hag a dro kein dim-ni.  
Barzed, o c'hoarzin goap ouz on youlou ken reiz !  
Med perag, o ! kenvreur ! perag fallgaloni ?

M'on-deus kenvroidi fall ken ez eo eur souez,  
Re vad on-eus ivez, asur, meur a hini,  
Ar re<sup>28</sup> 'gar on Labour hag a zelaou on mouez !  
Perag 'ta, o ! kenvreur ! perag fallgaloni ?

On yez a zo muioh 'vid biskoaz enoret  
Hag Istor on Tadou studiet ha karet.  
An amzeriou da zond 'zigor o divreh.

Perag 'ta, o ! kenvreur ! perag fallgaloni ?  
Hebdale, kred ahanon, ar Spered Kelt 'vo treh  
D'ar spered gall hudur a zinerz on Bro-ni !

C'hwevrer 1911.

**Notenn gand Embann an Hirwaz** : mond a ra re bell !

---

<sup>28</sup> Ar re : Pere, er skrid orin.

## Anken

Ho tischeol a glaskan,o ! koajou koz dero !  
Evid gouelañ en peuh... rag an Anken euzuz  
He-deus, hep trugarez ebed, rannet garo,  
Siwaz ! va halon a ozah karantezuz.

Warlene c'hoaz, bemdez, pleget war an ero,  
Me a gane dineh ! me a gane trouzuz !  
Bremañ n'ez eus ganin 'med garmou ha daero',  
'Med huanadou yen ha klemmou truezuz.

Bremañ ez on heñvel ouz eur paour diskiant.  
Peb youl a zo maro ennon koulz ha pep c'hoant  
Ha nebeud-ha-nebeud ar vuhez am huita !

Kement-se oll abaoe an deiz meurbed iskiz  
M'eo bet c'hoar va ene, va fried, va Maria,  
Falhet gand an Ankou e-kreiz he yaouankiz.

Ebrel 1905.

## **Breiziz penn-kil-ha-troad**

Te 'zoñj dit, Bro-Hall, ez om-ni,  
Breiziz, eur goz ouenn dianket !  
Ez om oll, hirie, gallekaet  
Ha sentuz oh da vestroni !

Ola ! Kement-se 'vad n'eo ket  
Na ne vezo ! Breiziz leal  
Hag anaoudeg, Breiziz feal  
Hepken ez om ! ha nann Franked !

Hag an ene a drid 'n on hreiz  
Na drid atao med evid Breiz  
On Mamm-Vro wir, heb eil, unig !

Gouvez eta, o ! Bro-Hall !  
Breiziz a-grenn om 'vel gwechall  
Euz a oueled on halonig !

Ebrel 1911.

## O ! heol !

Heol aour ! roue an deiz ! Reder koant ha skeduz !  
O ! te hag a zisfi an arneou garo,  
Falh kriz an Ankou yud ha c'hwervder an dero' !  
Euz a beleh 'teu dit da sklêrijenn baduz ?

Pa darzez en dremmwel, ar sterennou dister  
Enem guz en donder divent an neñvou glaz !  
Ha rouanez an noz ivez 'deh trumm, allaz !  
Dirazoud, o ! Priñs meur ken uhel ha ken taer !

C'hoarzin 'rez koulskoude d'on elfennig Douar,  
Beuzet oll, noz ha deiz, en eur mor a hlahar !  
Da vannou tomm zoken 'had ennañ ar vuhez.

Ha ni, e vibien wan, 'baouez da hirvoudi,  
Meur ' wech, 'vid, anaoudeg, kanañ da veuleudi,  
O ! heol madelezuz ! karet 'vel eun doue.

Gwengolo 1902.

## **D'on Breiz hepken !**

Na me 'garfe gouzoud perag emañ Bro-Hall  
'N on heñver-ni Breiziz atao ken displeal !  
Na me 'garfe gouzoud perag ivez e kar  
On moustrañ ken digar !

Marteze ne gav ket dezi he-deus gwechall  
On Fobl brezelekaet a-walh 'vid he diwall  
Ouz c'hoanteziou diroll ha krabanou gwadet  
Ar Zaozon halloudeg !

Marteze c'hoaz he-deus gwarizi ouz on yez,  
Ouz on lorh broadel pe ouz on nerz zoken !...  
N'ouzon !... Med me a gred penaoz hiviziken

E vije gwelloh dim renañ on tamm buhez  
En eru viroud on gwad koulz hag on oll veoder  
D'on Breiz karet hepken, 'vid kreski he haerder.

C'hwevrer 1903.

## Reier Ploumanah

An dibaotañ reier euz Breiz hag euz ar Bed  
A gaver 'neze founnuz en bro gaer Ploumanah.  
An neb 'n-eus o gwelet ne hello ket hen nah.  
Reier all par dezo n'ez eus nebleh ebed.

Mesk-ha-mesk int bodet a-hed an aochou gouez,  
Heñvel dimeuz loened euzuz-tre ha direiz.  
Ar galon dirake a drid leun a efreiz  
Hag ar spered a van abaf gand ar zouez.

O brud, pell amzer 'zo, a red an douar oll  
Hag an estrañjourien, bep hañv, 'zeu niveruz  
D'arvesti ouz o ment hag o stummou diroll.

Arvoriz ! bezet stad ennoh, bezet eüruz  
Da gaoud en ho Mamm-Vro heveleb kaerderiou !  
O diwallet gand nerz evel gwir deñzoriou.

Eost 1902.

## 824 - 851

D'ar houlz-se on Mamm-Vro, skeduz en he haerder,  
'Zave dispont he fenn 'mesk ar broadou all  
Rag eun den a furnez, a youl, rener leal,  
Nevenoe anvet, he sturie gand preder.

Dre ijin e spered ha nerz galonder  
Izellaad a reas oll rogoni Bro-Hall.  
Pa fiñve beg e viz hepken Charlez ar Moal  
E krene damantuz en despet d'e balhder.

Eun deiz, tot da Redon<sup>29</sup>, ar Frañsijen direiz  
Gantañ 'oent brevet mik hag an deiz-se da Vreiz  
E kinnigas broiou nevez pinvidig-mor.

On gourdadou e laesanvas "Tad an Arvor"<sup>3</sup>  
Gand abeg rag eñ eo a reas anezi  
Ken meur hag a roas eur vuhez frank dezi.

Gouere 1908.

Notenn a-berz Embann an Hirwaz :

---

<sup>29</sup> Redon : notenn gand ar skrivagner : E kompezenn Ballon, Even 845.



## Serr-noz

A-hont, 'n eur helh gwadeg, an heol ruz baleer  
A gouez ! hag ar zioulded war al lann a ziskenn  
Asamblez gand an noz. Ne glever bremañ ken  
An hekleo o tridal ouz gwerziou ar mesaer.

Hep trouz ; eun êzenn flour meurbed a nij en êr.  
A-wechou, 'kreiz ar peuh, mouez pell ar gwagennou  
A zav leun a anken ! hag o hlemmadennou  
A luskell dudiuz va ene huñvreer.

En donderiou an neñv heb diwez, goustadig,  
E tigor ar spered o daoulagad lirzin.  
Gwener ha Meurz, dreist-oll, a zell skeduz ouizn.

Ha peb enkreiz nijet, evid eur pennadig,  
Pell diouz va hreuz, en em lakan, a vouez-izel,  
Da ganañ tenerig ar "Housk, o ! Breiz-Izel".

Eost 1907.

## Adsavedigez Breiz

E-tal eur bez digor, o ! planedenn haro !  
Ankouaet gand an oll, Breiz a huanade  
Ha war he jodenn gann e ruille ar daero'  
Heb arzao, noz ha de' !

An Ankou fall, outi e selle digalon  
Ha yud, pa zavas trumm en peuh kuñv he mêziou  
Eur strollad niveruz a Varzed a galon  
Awenet o gwerziou !

Ha ken brao e kanent ! Ken brao ha ken lirzin !  
Ma 'n em lakaas ivez, d'he zro, da vousec'hoarzin  
Ha memez da ganañ gante, leun a veoder !...

Hag abaoe 'uz d'he fenn eun avel virvidig  
A hwez ! Adkavet 'deus he lugern, he splannder  
Hag euz he yaouankiz an ene birvidig.

Even 1904.

## Ar glañvourez yaouank

Kenavo, tadig kêz ! Kenavo, mamm garet !  
Kenavo, mor trouzuz, mor ha ne welin ken !  
Aochou gouez, reier du ha lannou alaouret,  
Prajeier, hentchou kleuz, kenavo da viken !

Ar maro en-dro din, 'hed an noz, 'hed an de',  
'Nij atao hag am spont ! Ha me ken pur, ken koant !  
N'eus forz ! Barnet ez on da vervel.Koulskoude  
Da vevañ eun tamm c'hoaz, o ! nag em-ije c'hoant !

Dreist-oll bremañ pa ruill an heol 'uz d'ar mêziou,  
Pa gan flour an evned, pa vleun ar menezioù,  
Pa hirvoud an êzenn, e-kreiz ar hoajou don.

Med an Ankou digar, allaz Doue ! 'zo dall  
Hag arhoaz 'vo klevet ar hleier o tintal,  
En tour koz an iliz, eur hlaz yen evidon !

Mae 1902.

Da Loeiz Kerzilin<sup>30</sup>

Gwerziour awenet Breiz-Vihan !  
Krouer uvel an “Herminik“ !  
Te hag a ganas heb dihan  
On Mamm-Vro, war da delennig !

Te, ar mestr fur hag en-deus greet  
Kemend a zeskiñ feal !  
Te hag a o bet ken skoet  
Gand eun tonkadur displeal !

Ankouez, hirie, tristidigez  
Ha poan-ene hag enkreziou  
‘Vid degemeroud, gand dudi,

O Kerzilin ! Anaoudegez,  
Karantez wir, trugareziou,  
Ha doujañs don ar Vreizidi.

Ebrel 1912.

---

<sup>30</sup> Da Loeiz Kerzilin : **notenn savet gand ar skrivagner** : Sonig savet evid eul levr gwerziou moulet en enor d’ar barz brudet-mañ.

## Krenet<sup>31</sup>

Krenet war ho tiouharr, tud lorhuz a Vro-Hall,  
Ha c'hwi, re a Vro-Zaoz ! 'Glevet ket o youhal,  
Gand fulor gouez, poblou Keltia unanet  
'Eneb d'ho nerz diroll, koz marherien daonet !

'Glevet ket o trouzal e-kreiz al lanneier,  
En donder ar hoajou mouez dir ar hlezeier !  
'Glevet 'ket, en peb leh, o kanañ ar varzed  
Hag o respontañ deze an hekleioiu kuzet ?...

Krenet 'ta ! Krenet oll ! Tiranted an diou Vreiz.  
Fin 'zo d'ho torfejou ha d'ho puhez direiz.  
O tihun 'mañ Arzur, flammou 'n e zaoulagad !

Krenet ! An deiz 'zo tost ma kerzo d'an argad,  
Leun adarre a veoder, m'ho treho ha zoken  
M'ho pounto toud er-mêz e Vamm-Vro da viken !

Here 1902.

---

<sup>31</sup> Krenet : Krenit.

## Bro-Gerne

O ! bro goant a Gerne ! Bro an dud dir ! Lorh Breiz !  
Bro leh e huanad heb ehan ha heb reiz,  
Kemend a vammennou kuzet 'mesk ar reier,  
Huñvreet 'm-eus erfin e-kreiz da lanneier.

Redet em-eus ivez da hentchou torgeneg,  
An avel en-dro din o c'hwezañ buaneg.  
Trezet 'm-eus da barkou, da goajou don ha du,  
'N eur ger, baleet 'm-eus da vêziou a bep tu.

Ha laouen on bremañ ! Evuruz ha chalmet,  
O Kerne ! Da gaerder en-deus va estlammet  
Ken em-eus touet chom e skeud da veneziou,

Pell diouz ar Gall ha pell diouz e follenteziou,  
Da renañ va buhez, didrouz ha dibreder,  
En eur denañ da lêz mezuruz<sup>32</sup> mamm zeder !

Gwengolo 1904.

---

<sup>32</sup> mezuruz : **Notenn gand ar skrivagner** : maguz, bividig.

## Youlou ar Vreiziz

Ar Vreiziz a fell deze gweled o langach kaer  
Doujet gand an estren ! Desket d'ar vugale  
'N o skoliou, ha komzet euz eur penn d'egile  
Euz o gourenez ker !

Ar Vreiziz a fell deze miroud krenn o gizioù !  
En em unani stard 'vid bezañ didrehuz  
Ha gweled o tridal o bannielou luhuz  
War lein o menezioù !

Ar Vreiziz a fell deze boud gante o-unan,  
Renet gand poell, hervez spered o Gouenn, ha nann,  
Evel emaint hirie, 'eneb d'ar skiant-vad !

Ar Vreiziz a fell deze, erfin, gand o Bro,  
'Mesk ar broadou meur, o kemer renk da vad,  
Nerzuz 'vel he reier ha sonn 'vel he dero !

C'hwevrer 1909

**Notenn gand Embannadur an Hirwaz :** Red-groñs e vefe bet kelenn ar brezoneg er skoliou, ha nompas ober gand "Ar galleg nemetken ne vo greet gantañ er skoliou", pezh a zo gouennourez, med an traou all ?...

## Da Germarker

Enor da Germarker ! Breton rik hja barz mad,  
Enor ! Enor dezañ !  
A-dreuz d'ar hantvejou gand herder ha dalhmad,  
O ! Breiziz a galon ! Dalhom soñj anezañ.

E oberou dispar ha gouizieg ha founnuz,  
War on lizeradur  
A daol atao, a skuill eur hloar ken lugernuz  
M'o-deus erez outi ar Frañsizien hudur.

Diskwelet 'n-eus d'ar Bed pegen kaer eo on yez,  
Ha penaoz n'ez om ket, pell ahane, tud gouez,  
Med eur Bobl ijinuz, reiz, fur ha karadeg.

Setu aze perag e tleom 'n e geñver  
Bezañ leun a zoujañs, Arvoriz anaoudeg !  
Enori e eñvor 'zo 'vidom eun dever.

Gwengolo 1906.



## Breiz hag he mibien

Me 'gav din na 'n-eus ket eur Vro,  
Er Bedig-mañ, ken azeulet  
Gand he mibien ha Bro galed  
Ar brugou ruz hag an dero.

N'eus forz peleh war an douar  
Emaint divroet, o ene  
D'he houn a drid gand levene',  
Gand karantez ha... gand glahar.

Pa en em gavont entrezo,  
En o yez kaer, ken c'hwek dezo,  
Son he geriou eo a gomzont,

Ha leun o halon a veoder  
Da veuli Breiz o mamm zeder,  
Oll a-gevred ne baouezont.

Ebrel 1907.

## Esper Brizeuk

An Ankou yud am galv ! Mervel 'ran dibreder,  
Sevenet ganin-me eun ober talvouduz  
A argaso eun deiz, er-mêz va Bro zeder  
He gwasañ enebour : a Spered gall bourduz !

Ma'z on ar hentañ barz ne vezin ket avad  
An hini diwezañ ! Dre forz lenn va gwerziou  
Ar Vretoned 'zeuio d'en em anaoud ervad  
Ha da garoud o Breiz, he yez aour, he giziou.

Ha nezue en o zouez barzed a ziwano  
Dre gant ! Ha war o lerh, ouz son o zelenno',  
Ar bobl a-bez d'an Treh a gerzo gand eurvad !

O Doue ar Gelted ! Euz da Wened lufruz  
Da weled se, 'raog pell, em-eus an Esper vad  
Ha gand an Esper-ze e varvan evuruz.

Genver 1909.

**Notenn gand ar skrivagner :** Gwened : Bed gwenn, baradoz ar Gelted koz.

## Me ‘gar...

Me ‘gar al lannou braz gand o bleuniou melen,  
Gand o reier uhel ha gand o brugou ruz.  
Va halon, pa zellan oute, lamm evuruz  
Em hreiz, ha va ene a drid ‘vel eun delienn.

Me ‘gar ar hoajou don, ar hoajou koz dero,  
‘Leh e vouskan en peuh al lapousedigou,  
‘Leh e voud an êzenn ‘mesk an deliouigou,  
‘Leh e oeul da zerr-noz ar haouenned garo.

Me ‘gar ivez meurbed, me ‘gar ar menezioù,  
Gwir vronnou ‘menn skuill dalhmad, gand largentez,  
O doureier trouzuz ha fresk war ar mêzioù.

Med, kant mil gwech muioh, diventañ karantez !  
Me ‘gar an “hini hlaz“, me ‘gar, me ‘gar ar mor,  
A yud, a groz, a gan, tro-ar-dro d’an Arvor.

Even 1908.

## Lorh a zo ennon

Bro nerzuz an dud dir ! Bro galed ar reier !  
‘Vidon da voud ganet pell diouz da lannieier,  
Da Vrezoneg, yez aour, koant evel na zo ket<sup>33</sup>,  
Me, ma-unan, en daouzeg miz, ‘m-eus he desket.

‘M-eus he desket, o ! Breiz-Izel ! ‘vid da ganañ,  
‘Vid da veuli ‘vel m’eo dleet, hag entanañ,  
Dre va zonetennou, kalon da vibien vad  
‘Eneb d’ar Frañsizien o gwaskerien divad.

‘M-eus he desket evid da garoud muioh c’hoaz  
Hag ivez kompren gwelloh eged biskoaz  
Oll gaerderiou kuzet ha dinamm da ene...

Bremañ va halonig ‘zo leun a levne’,  
O Breiz ! Ken lorhuz on o houeoud<sup>34</sup> ar yez  
A gomze gawe-chall-goz an delennerien ouez !

Ebrel 1903.

---

<sup>33</sup> na zo ket : tregerieg : n’eus ket.

<sup>34</sup> o houeoud : o houzoud.

## Mann da hortoz

Dilezet em-eus krenn politik ar Gall !  
Mar plij dezañ boud ruz, pe glaz, pe du, pe gwenn,  
Pa disliou, se avad a zo din-me ingal,  
Rag fiziañs 'bed n'am-eus en maher koz on Gouenn !

Er Gambr, on hannaded a zo skuiz o pedi  
Anezañ, heb arzao, da rei eun tamm frankiz  
D'on Bro zantel na ra neemd huanadi  
War o foan didalvoud ha war he stad iskiz !

Anad ez eo ha sklêr n'on-eus-ni Bretoned,  
Mann ebed da hortoz ezu e berz 'med krizder,  
Goap, dizanaoudegez, rogoni ha tennder.

Beteg an deiz e-leh ma vefom unanet  
Ha n'on-do 'med eur youl ! Neuze 'vad e hellfom,  
Heb goulenn digantañ, kemer pezh a garfom !

Gwengolo 1910.

## Huñvre ha gwirionez

« Va daoulagad, skuillet daero’  
An teatr breton ‘zo maro,  
Dilezet-mik hag hep true’  
Gand va broiz, allaz Doue ! »

N’eus ket gall-bell setu penaoz,  
E hirvoude da hanternoz,  
‘Kreiz eun huñvre foll ha direiz,  
Eur skrivagner brudet a Vreiz..

Hogen, abred euz ar beure,  
Atao dindan gwask e huñvre,  
Dihunet erfin pa zavas

‘N e gambr-labour, petra gavas ?...  
« Eur grugell peziou-c’hoari kaer  
Nevez-savet en on Yez ker ! »

Gwengolo 1905.

## Menez-Bre

O ! menez meur ha gouez ! O ! menez gloriuz !  
Bez alaouret Gwenhlan ! Tron uhel sant Herve !  
Gand doujañs ha gand lorh, en o gwerziou neve',  
An oll varzed a veul da gaerder dudiuz !

Menez-Bre ! O ! menez barzoniuz an Tregor !  
Ouzit pa zellan-me, pell diouz va halonig,  
Melkoni ha preder a deh kuit buanig  
Ha d'an Awen, raktal, va ene a zigor !

Te eo, o ! menez sakr ! Gwyddfa<sup>35</sup> on Bretoned ;  
Kermarket ha Luzel, Yann ar Gwenn ha Rannou  
O-deus evet, eun deiz, euz dour da vammennou.

Ha setu, marteze, perag o-deus kanet  
Ken tener ha ken brao ha ken reiz war eun dro,  
E-pad o buhez oll, Breiz-Vihan, o Mamm-Vro !

---

<sup>35</sup> Gwyddfa : **Notenn gand ar skrivagner** : Parnas barzed Cymru.

## **An amzer ‘hall tremen...**

Pontkalleg ha Montlouis ! Talhouet ha Dukouedig !  
Broadelerien valh ! Harozed virvidig !  
Hoh anoiou a zo da viken garanet  
    En kalonou ar Vretoned !

Rag n’hellont ket ankouad ho-peus ‘pad ho puhez,  
‘Vid Frankiz ho Mamm-Vro, heb arzao, stourmet gouez,  
Na kennebeud ez oh bet ‘vid se dibennet  
    Gand ar Gall yud en kêr Naoned,

Gand ar Gall kriz, gand ar Gall zod, gwir den e breiz,  
Entanet a gounnar bewech ma tigor Breiz  
D’an Esper kuñv he daoulagad leun a zaero’,

An amzer ‘hall tremen, ouz e heuill ar maro  
Hep trugarez, n’eus forz, merzerien veuleuduz !  
E-touez ar Vretoned, ha koun ‘zo peurbaduz.

Here 1910.



## Va hoantiz

Biken daoulagad ar merhed  
'Nam lakfont da huanadi  
Rag da Vreiz-Izel 'm-eus roet  
Va oll garantez gand dudi.

Chlamou skeduz ar merhed kaer,  
'Vel re ar bleuniou 'zo marvel !  
E-leh re Vreiz, va hoantiz ker,  
A zo paduz ha divarvel !

Kerdennigou va zelennig  
Ha nervennoù va halonig  
A zaskren<sup>36</sup> 'viti, a-gevred,

Hag a zaskrno hep paouez  
Hag hep fallaad, 'hed va buhez,  
Rag feal dezi 'vin bepred !

Meurz 1909.

---

<sup>36</sup> A zaskren : **notenn gand ar skrivagner** : "vibrer" e galleg.

## Mestr ha mevel

Me a zoñj din avad ez on o huñvreal !...  
Penaoz, Breton, te a garfe boud digabestr  
Ha dieub ? ha terri va nerz hag an hual  
A zo stag ouz da dreid ? Ola ! dit, me 'zo mestr.

Selaou mad kement-se, o ! den rust ha dibenn !  
Ya, dit, me a zo mestr ! ha din, te 'zo mevel !  
Dirazon serr da veg ha pleg izel da benn  
Ha dilez 'vid va heuill koz douar da gavell !

Dilez 'vid va zervich pried ha bugale !  
Ha kerz da vrezeli evidon hebdale  
Er broiou gouez mervel evid kreski va gloar !

Goude, mar bez beo c'hoaz, me az rekompañso  
'Vel m'eo dleet en eur... brometi dit al loar !  
Ha muioh en ez Preiz, muioh, me az preso !

Du 1911.

## Enez Eusa

E-kreiz mor brumennuz an hanternoz, kollet,  
Enez Eusa, enez an euzusted, evel  
En eur havell a hun ! heb arzao luskellet  
Gand krozmol ar hoummou ha yud gouez an avel.

‘Mesk ar reier, goloet oll a vorvrini,  
E vev paotred hardiz, hebaon rag an arne,  
Ha merhed koant ha fur, med leun a velkoni,  
Ha gand broud an anken strafuillet o ene.

Rag tro-war-dro dezi ar morwargez daonet  
A gan flour hag a chqalm dre zellou entanet  
O halonou da galz eur he mordeidi,

Ar re<sup>37</sup>, eun deiz pe zeiz, en em daol gand dudi  
‘N o divreh ‘vid galloud (hervez an danevell)  
Tañvaad eur pennadig d’o harantez varvel !

Gwengolo 1907.

---

<sup>37</sup> Ar re : Pere, er skrid orin.

## **Banniel Breiz**

O banniel benniget !Arouez digaiilar Breiz !  
Bewech ma sellan ouz da hermenigou flamm,  
Bewech va halonig a wir Vreizad a lamm  
Gand fouge ha gand stad ha gand dudi em hreiz !

Pa strakez en avel, me 'gred eo va Mamm-Vro  
A glevan o hervel he mibien hirvouduz  
D'en em unani stard 'vid bezañ gallouduz  
Hag heb aon dirag nerz ar Frañsizien hao !

Heh ene 'n-eus plegiou a zaskren brividig,  
Ar Vreiziz a dle 'ta, en-dro dit, 'n em strollañ  
Hep gortoz tamm ebed hag hep troidellañ.

Ma fell deze kaoud eur vro nerzuz ha pinvidig  
En amzer da zoned, beo-buhezeg 'vel gwechall  
Skubet a-grenn euz damant Bro-Hall.

Bloavez ebed.

## **An amzeriou ‘zo arru**

O ! na pebez dudi ! Na pebez fougereiz !  
A garg hizio an deiz kalonou ar Gelted !  
O ! ne pebez gêder ! Na pebez joaüsted  
A ren erfin e-touez bugale an diou Vreziz!

Leh o-deus, evid gwir, leh o-deus da vezañ,  
Mutoh eged biskoaz, evuruz ha lirzin  
Rag an amzeriou kaer diouganet gand Marzin  
A zo arru ! Dija Iwerzon, ar vrasañ

Euz ar broiou kadarn, Iwerzon, bet kouezet  
Ken izel, ‘mañ dirag an oll-ved souezet  
O paouez adkavoud he frankiz a wechall.

Ha gand eun nerz nevez, bremañ he c’hoarezed  
Cymru ha Skos, ha Breiz, ha memez kernewall  
A aoz ivez, dindan bleinadur ar varzed,  
An emgann meur hab laz o rento dishual.

Mae 1912.